

# Da Santez Tereza ar Mabik Jezuz

(Var don : *Petra zo henoaz a neve*)

*Salud d'ach Pliz  
Evit herañ gant Doue*

## I

Etre ar bed hag an Envou  
Eur Rosen a zo diouanet,  
Eur Rosen ken splann he deliou  
Evel an erc'h nevet gouezet

## II

Ar Mabik Jezuz hé c'hadas  
Neur gouend didrouz ha zantel.  
Nao bloa eno e "tizelias"  
Dindan e dreid glan a bugel.

## III

Pell re gaër evit hon zraouien  
Ar vleüu a zizec'has eun de  
He zroad, en dour ar binijen,  
Teuzet gant heol ar garante.

## IV

Jezuz, ar Liorzer divin,  
A gutuillaz e vokat roz,  
Leun a c'houez-vad, a c'hliz mintin,  
Vit balsami ar Baradoz.

## V

Met aboue, vel eur glao dispar,  
D'an disteran mennad a fe,  
Euz an Envou war an doar,  
Leliou roz-guenn a goue. . . a goue.

## VI

O Tereza, âel a beden,  
"Rouanezig" a drugare,  
Selaouet ar galv a anken  
A gas ar bed trezek Doue.

## VII

Savet, diskennet "hep repos"  
Deut da louzaoui peb glac'har,  
C'houi hag a lak "ho Paradoz"  
D'ober ar vad war an douar.

## VIII

Goulennet true da vro Frans,  
Goalabet gant goad he merzerien,  
Goulet ma zavo gant fizians  
Da c'heuil banniel ar fe gristen.

## IX

Ha da c'hoant devus ho kalon  
Jezuz a blego, o santez !  
Hen a rei d'imp gant e bardon  
Eul loden deus ho karantez.

PH. C.

Tous droits réservés.

*Philomène Cardoret*

IMP. LE TROADEC, 1, PLACE DE LA MAIRIE - CARRHAIX

*Koulmik Anvor*